

RUMM E

- 5 f -

01-06-1966

---

# GWENEDOUR

---

da

GOADMOC'HAN

GWITIBUNAN

gant

yellen


da  
GOADMOC'han  
GWITIBUNAN

yellen

da  
GOADMOC'han  
GWITIBUNAN


hillion  
EMBANNER  
ARZHON

skrid goapaus  
a ratozh evit an dourisked



dedi

pep gwir miret strizh





d'AR RIGENNAD PRIÑSED ha priñse-  
zed a goadmoc'han betek-hen.

d'hon zourisked karet; pinvidik  
ra vezint !

d'hon c'henvroiz vat a zegemer  
an dourisked karet ha pinvidik  
gant kement a galon !

## Raklavar

Gwenezan, 18 meurzh 1951 gou-  
de J. K.  
mezh am eus. ya, ur vezh vras  
eo !

perak ?

soñjit emañ kantvedoù 'zo priñ-  
selezh koadmo'han war c'horre ar  
bed ha n'en deus en em gavet den  
ebet c'hoazh da skrivañ pe da em-  
bann ul levr, ur pennad-skrid, ur  
frazenn zoken, evit reiñ da c'hou-  
zout diwarbenn priñselezh koad-  
moc'han n'eus nemet !

ne dalv ket skrabañ ar penn-  
'dreñv mar deo en empenn emañ  
an drebon ! n'hellan mui padout.  
emaon diouzhtu o vont da voul-  
c'hañ pajenn gentañ istor vihan  
priñselezhig koadmoc'han.

Da gentañ em boa soñjet gervel  
ur mevel, evit kas anezhañ da bediñ  
ur sekretour da zont. n'eo ket diaes  
lakaat un all d'ober al labour !...  
met, goude prederiañ, eo deuet  
anat din :

PRIMO : ne weler se nemet er ro-  
mantoù pe er sinamaioù.

EILO : sul eo hirie !

TRIO : den na skrivo, diwarbenn  
ar briñselezh, kenkoulz hag he  
friñs e-unan, na petra 'ta ?  
ha c'hoant am eus ma vo graet  
an traou diouzh ar c' hentañ.

OUTRE da se, ne gerzh ket mat ar

sonerezh-tredan, prenet koulskou-  
de e bro-c'hall.

evel just, warc'hoazh, pa ouezo  
kentañ pismiger-war-ar-protokol  
an afer-se, em bo lec'h da glevout  
ur brezegenn gaer, ur sarmon  
gant jestroù munut, evit displegañ  
(ha prouiñ) din, sklaer ha splann,  
war baper-seiz, penaos n'eo ket  
kefridi ur priñs pleustriñ, evelse,  
war ur « reklam » evit touriskedi !

- hogen, bez' e vije un tu din,  
(hag a respontin dezhañ), da gem-  
penn an diaester-se : n'em eus ne-  
met sinañ gant un anv dianav !

- ya emezañ raktal, met un  
anv dianav, pebezh publisite dister  
evit ul levr touriskel !

- ac'hanta, emeve, kemer a rin  
neuze un anv hanter-anavezet : va  
anv-barzh, yellen, na petra 'ta ?

ha klozet mat an darvoud.

setu graet an afer, evit pezh a sell ouzh ar raklavar. ar peurdiaesañ a van d'ober avat. nemet hon eus spi e kaso « yellen » an oberenn da vat, evit brasañ klod priñselezh kozh hon tadoù.



( amañ stell priñs koadmo'chan )

## ETRE - LAVAR

Daoust ha lennet ho pefe ar  
raklavar ? daoust ha ne vefec'h ket,  
kentoc'h , en touezh an dud lezirek  
ha na lennont morse ar raklava-  
rioù ? keuz ho po ! n'eo ket re-zi-  
wezhat;... hastit hen ober... Biskoazh  
kement-all !

ac'ha !

lennet eo bet ganeoc'h ! mat !

Bremañ teurvezit, mar plij, teu-  
rel ur sell war ur rakskrid berr a  
zeu daheul :



## RAKSKRID (BERR)

Tud 'zo hag a gavo sur-mat da lâ-  
rout ha da rebech en askont d'ar  
yezh implijet amañ : o soñjal, mar-  
teze, ez eo brezhoneg loarius.

n'hon eus ket an disterañ c'hoant  
da gomz pe da skrivañ yezh an  
estren ! setu perak e kavfot alies  
diforc' h etre hor c'hoadmoc'ha-  
neg hag al langachoù implijet e  
breizh.

echu ar rakskrid.

pa lavaren deoc'h e vefe BERR !

perak  
ne gaver ket  
er c'henwerzh  
kartennoù  
ar briñselezh

Laouen bras e vefemp o c'hellout lakaat, etre daouarn an dourisked, tresadennoù ha kartennoù - BRO : ur gartenn a rofe dezhe da c'hout pelec'h an diaoul eo pintet koadmoc'han; dre belec'h dont ha mont di.

siwazhhh ! harzet omp diouzh ar c'hoant se gant ur skoilh tev: ar politikerezh !

n'eus netra ken prizius hag ar peoc'h, evit ur vro, ha n'eo ket deuet ar mare d'en em lakaat en brezel, e sigur harzoù-bro-war-bapper... evit kompren, n'eo ket dreist-ezhomm diskleriañ penaos en em gav stad ar briñselezh :

Gout ouzoc'h, moarvat, ez eo gwir pep pobl, bras pe vihan, ren hec'h unan he feadra; kement-se a seblant bout sklaer, ha nikun ne

gav da rebech ! setu ur wirionez hag a zo gwir ma komzer eus broioù pell ; hogen, pa vez kaoz eus broioù amezek, nag ur gudenn all, priñselezh koadmoc'han en em gav dispartiet un tamm dre holl, etre rannvroioù hanter-noz armorika. ac'hanta, ma vefe moulet ur gartenn, ganeomp koadmoc'haniz, e vefe kavet, diouzhtu-dak, tud e Breizh da wigourat evelhen :

- krignet 'deus adarre ar goadmoc'haniz fall se douar Breizh paour !

pe : - Breizh paour, ken argaset dija ! ur vezh eo gwelout estranjourion (koadmoc'haniz evel-just) o krignañ c'hoazh ouzhpenn douar sakr o mamm-gozh-vro !

pe c'hoazh : - ma n'eo ket ur vezh ! en ugentvet kantved ! paz eo



ken diaes en em zifenn ! pa dlefe ar bed-holl en em unaniñ... ober evelse dispartioù er yezh, er politikerezh hag all...! elec'h en em silañ sioul dindan banniel ar vammgozh-vro-vras ! (BREIZH UR VRO VRAS ? hi hi hi hi !) - a, lala ! koadmoc'haniz n'int nemet un astez "mokoed" paeet gant ur parti gall bennak !

pe neuze : - betek pegoulz e lezomp ar goadmoc'haniz d'ober evelse ur stad e diabarzh ar stad ?

evit troc'hañ berr d'ar gwall gomzoù-se, ne reomp kartennoù nemet war vusul, evit hon ezhommoù diabarzh ha diouzhtu ma vez achu gante, e vez c'hwezhet an tan enne, evit brasañ dudi ar vugale.

" diskresion, diskresion ", 'vel

ma lavar ar c'hallaoued, sed aze ur vertuz c'hall hag a rafe vad da galz !

## stad politikel priñselezh koadmoc'han

En askont da « gwir-ar-bobloù-d'en-em-ren-o-unan », priñselezh koadmoc'han en em ren hec'h unan, bras awalc'h ha kozh awalc'h maz eo evit hen ober ! met n'eo ket hi evel pobloù all zo, dalc'hmat o c'harmiñ war bouez lezennoù an estren, atav o 'n em welout gwas-

ket gant an eil pe gant egile ! priñselezh koadmoc'han he deus dibabet pell'zo an tu da lezel ar bobloù all d'en em zibab ha d'en em zornañ kenetreze. diouzh hon ferzhni, tabut ebet, sach ebet.

pa voe taget breizh gant bro-c'hall, ha kavout a ra deoc'h e savas breizh he fenn un disterañ evit lavarout :

- taget on me, marteze, ya ! gwir eo ! nemet n'eo ket dereat deoc'h tagañ war memes tro va amezegez ar briñselezh a goadmoc'han, peogwir n'he deus biskoazh trempet honnezh he bara gant hor soubenn-ni !

nann, tudoù gaezh, ne vefe ket deuet ar skiant da vreizh da lavarout se da vro-c'hall ! panevet se, ur vro nobl ha leal, na pegen leal,

evel bro-c'hall, ar vro latin se n'eus nemeti, ken furaet, o vezañ ma vez dalc'hmat o sunañ laezh kristen bronn he mamm an iliz, hi he merc'h henañ, bro-c'hall c'hoazh ur wech, kwa, (1) n'he defe, panevet se, lonket, taget ha chafoutreet priñselezh koadmoc'han war ar memes tro ! nann ! n'he defe ket graet ! koadmoc'haniad ebet n'en deus doutañs ! setu perak koadmoc'haniñ a c'hell bezañ mignoned vras gant ar c'hallaoued !

m'hon eus un draig bennak, gwech ha gwech all da rebech da vro-c'hall, e keñver he doareoù paperiadus, fentus, « idiotus » pe skrijus da ren ar broioù gwasket ganti, piv a vefe kiriek, ma n'eo ket

(1) "kwa" : koadmoc'haneg rik, a dalvez da "eta".



BREIZH hec'h unan; BREIZH, ha n'en deus morse bet « koñsiañs deus he respoñsabiliteioù »?

neuze, 'vat, kwita, peogwir n'hellomp ket ni, koadmoc'haniz, dispenn ar gudenn luziet a zalc'h BREIZH ha BRO-C'HALL stag-ha-stag, n'hellomp OBER nemet un dra : BEVAÑ div vuhez !

BEVAÑ div vuhez, ya ! : UR vuhez faos hag UR vuhez GWIR !

UR vuhez faos :

- OBER NEUZ DA VEZAÑ gallaoued.
- OBER NEUZ DA lenn galleg
- OBER NEUZ DA vrezeliañ evit BRO-C'HALL. (an nebeutañ ar gwellañ).

- OBER NEUZ DA baeañ KONTRIBUSION DA VRO-C'HALL. (ha tremen hep OBER BEP gwech m'eo posubl).

- OBER NEUZ DA evañ GWIN AR

C'hallaoued. (ar muiañ ma c'hellomp ha diouzh ar gwellañ hini ma kavomp).

- OBER NEUZ DA selaou an emisionoù gallek. (diaes, avat, peogwir ne zeuont ket atav betek amañ.)

- OBER NEUZ DA votiñ evit deputeied partioù politikel BRO-C'HALL. (ur vouezh bennak da bep parti).


- OBER NEUZ DA VERZIAÑ gouel nasional BRO-C'HALL, deiz ar c'hato-rez-chuilhed.

- OBER NEUZ DA grediñ penaos hon tadoù kozh - kozh a oa « goloaed » evel re tud mat da gas karr (madagaskar, hi, hi, hi, hi, !)

- OBER NEUZ DA grediñ penaos eo BRO-C'HALL ar gentañ pe an eil pe an deket pe an hanter-kantvet BRO VRAS AR BED !

evelse e c'hell ar c'hallaoued

chom laouen ganeomp; ha ni gantei  
en tu-hont da se, avat, e vevomp  
evel koadmoc'haniz rik, hep ober  
neuz, zoken, war ur banne pur-ju  
avalou, kreiz-tre daou vanne gwinn  
maskara.



« gwenezan by night »

## Ganedigezh ar Briñselezh

Anv koadmoc'han a vez kavet  
meur a wech er paperioù kozh-  
kozh-kozh ma vez tennet dioute is-  
tor pep bro. fentus awalc'h eo  
gwelout penaos eo en istorioù  
breizh e vez meneget peurliesañ  
an anv-se.

kavout her greot el levr-mañ  
tresadenn un daolenn gozh he  
c'hellfec'h gwelout ivez, nemet vi-

loc'h, war istorioù BREIZH a zo : en  
dro d'ar bloaz 1.300, dija (goude  
J. K.) e welit aotrou gwilh a goad-  
moc'han o kas e vab da skolaj pariz,  
pezh a ziskouez eo bet techet atav  
an tiegezh da gemer deskamant.

n'hon eus ket c'hoant da derrañ  
ho penn gant kentelioù istor koad-  
moc'han; hogen, evidoc'h da c'hou-  
zout un draig bennak diwar-benn  
un nebeut a bennoù bras a goad-  
moc'han, evit ho harz da venel  
sac'het, kwa, ma teufe deoc'h  
kaout darempred gante, setu, war  
lerc'h un disterañ tra :

emaomp er bloavezhioù 1870-72.  
BREIZH ha BRO-C'HALL, kemmesket, a  
zo oc'h ober brezel ouzh ar bru-  
sianed; ha fall o stad, war ar mar-  
c'had !

du-hont, e koadmoc'han, noblañs



VRAS a-viskoazh, e VEZER o c'hortoz gant anken ar soudarded aet d'AR BREZEL. gwech ha gwech all e teu hiniennoù d'AR GÊR. ne vano BREMAIK nemet AOTROU CHARLEZ, dimezet da BERCHENNEZ KOADMOC'HAN. en em lediñ a RA o DOUAROU NIVERUS war PARREZIOU PEDERNEG, TREGLAÑVIZ, LOUARGAD, BENAC'H, BOLEZAN, TREZELAN ha GWENEZAN; DOUAROU ANVET KOADMOC'HAN ABAOE MAZ EUS TUD war an douar ha moc'h gouez er c'hoadoù. eno, en he zi NEVEZ, ( nevez d'AR c'houlz-se peoGWIR ne oa ket bet amzer da lidañ ennañ fest al leur nevez) ,emañ an ITRON o tremen hec'h amzer reuzeudik. gwisket eo dija evel un intañvez, daeroù en he daoulagad bep gwech ma soñj en he fried kaezh ha ne zeuio sur awalc'h bi-

ken en DRO.

ne van spi EBET ken. ha, trumm, setu keloù nevez : emañ an AOTROU o tistreiñ ! o, va zud kaezh ! nag ur c'hemm; nag un EURVAD! diouzh-tu en em gav ar genaouioù leun a veuleudioù. al levez a BAR war di an ITRON. ar merc'hed diouzh ar renk uhelañ, heuliet gant ar RE-ALL, a ya di da gomerezañ.

pep hini a gont dija, en araok, an eil d'egile, an troioù marzhus en devo sur mat c'hoariet aotrou charlez ken kalonek, epad ar BREZEL.

AR SISTR a zever diouzh an tonelloù hag al libij diouzh ar podoù. leueioù en o fezh a rost war an oalidi. tregerniñ a ra an aer gant fraoñv ar fest bras o c'horiñ tro-DRO.

pennfollet eo pep hini, bras ha bihan, gant al levenez, pe gant ar sistr.

e-keist-se, ar mestr a dosta ... n'emañ ken pell... arru eo !

war ar c'hlazenn, en daou du d'an hent, eo bodet ar bobl ! an holl a huch a-unvouezh :

- bevet ar priñs ! bevet priñs koadmoc'han ! bevet hon tiern kalonek !

setu penaos e kavas mat d'ar bobl envel e aotrou adalek neuze - setu penaos aotronez douaroù koadmoc'han a zeuas da vezañ priñsed ha, war memes tro, an douaroù da vezañ ur briñselezh !

petra c'hallfe bezañ gwiroc'h pe welloc'h eget mouezh nobl ur bobl nobl ? petra c'hallfe bezañ gwirionekoc'h eget ur briñselezh krouet

dre youl an holl ?

ya, tiegezh ar prins charlez en deus ar gwir da vezañ lorc'h ennañ goude un darvoud ken eurvadus !

ya, relegoù ar re gozh a goadmoc'han o deus sur mat huruset gant levenez, p'o deus gouvezet e oa savet noblañs koadmoc'han da renk ur briñselezh ! ha se, hep skuilh un dakenn wad, hep reveulzi c'hall, hep gwarizi a-berzh nikun !

**PREDERIADENN  
DIWAR-BENN  
AMZER-DA-ZONT  
KOADMOC'HAN  
HA BREIZH**

Ret eo troc'hañ berr, el levrig.



mañ, d'ur falskredenn : ya ! re a duð zo o soñjal eo koadmoc'han enebour ða vreizh. nag ur sotoniezh ! nag un torfed e reer o krediñ un dra ken mantrus.

n'eo ket war zigarez ez eo koadmoc'haniz mignoned gant ar c'hallaoued, dre hengoun touriskel, n'eo ket war zigarez ða se e kasaont an dourisked vreizhat, na petra'ta ! piv an diaoul en deus roet an dra se ða grediñ ða vreizhiz ?

re a draou boutin a vez etre an div bobl ; re a heñvelled evit magañ enebiezh.

ne gredomp ket e vezo c'hoazh unan bennak o soñjal an dra ken faoz-se goude m'en devo lennet al lodenn levr-mañ.

priñs koadmoc'han an deiz a hirie 'zo ur mignon bras ða vreizh.

abegoù a-walc'h en deus evit se : soñjit n'eo eñ ur c'hoadmoc'haniad nemet a-berzh e vamm ! e ðad'zo diskennet diouzh un tiegezh nobl a vreizh ! meneget eo anv e diegezh e paperioù kozh istor vreizh, ha prouet eo pell'zo en deus e tadoù-you kozh-kozh graet o le ha roet o ger d'an aotrou dug yann pevar a vreizh evel o doa graet an holl dierned all, ar re vrogarour, ða nebeutañ !

priñs koadmoc'han an deiz a hirie en em ziwall ða zisoñjal un dra ken pouezus ; ha n'hon eus ket doan, ni koadmoc'haniz, c'hoazh na pa vez graet diouzhimp gallgarourion (pe frankofilion, ma kavit gwelloc'h) ða reiñ skouer d'ar vretoned war ar poent-se !

skrijus eo gwelout pegen nebeut

a VREIZHIZ a zalc'h soñj o deus roet o zadoù kozh o ger da yann pevar. na kaer e oa, gwechall gozh, gwelout BREIZH ha koadmoc'han kazel ha kazel !

EVURUZAMANT EZ EUS TUD E BREIZH hag a gompren ! tud yac'h o spered ha n'o deus ket BET doan d'enoriñ koadmoc'han e keñver pe geñver : ha c'hwi a ouie e oa BET DEGEMERET PRIÑS koadmoc'han e skol VEUR BARZHEÐ gourenez BREIZH ? (dres 'vel m'eo BET DEGEMERET ROUANED BROSAOZ e skol VEUR enez preden ?)

priñselezh koadmoc'han a-bezh he deus youc'het ha graet stlakadeg-daouarn d'ar c'heloù-se. er c'hontrol, den ebet e BREIZH n'en deus daspouezet. ha n'eo ket mantrus ? skrivet fall eo BET, zoken, anv ar PRIÑS en « west-vro-c'hall » hag er

c'hazetennoù BREIZHAT all !!! Biskoazh kement-all !

ne c'hell ket an unan ober dalc'hmat ar c'hammed kentañ. ret eo lakaat youl vat e pep kostezenn !

en tu-hont da-se (ya ! rak ne dalv ket ar boan en em lediñ), en tu-hont da-se eta, peogwir ez eus darempredoù mat etre koadmoc'han hag ar bed-holl, ne welomp ket perak e rafemp diforc'h evit BREIZH - pezh oa da BROUIÑ ! (p. o. d. B.).



pinvidigezh vras  
priñselezh  
koadmoc'han...

Ezhomm o deus broioù 'zo da  
vrasaat un tammig, lorc'h enne, o  
finvidigezhioù, war baper, evit  
dedennañ muioc'h an dourisked.

priñselezh koadmoc'han, hi, zo  
ken pinvidik e kement doare, ken  
e vo a-walc'h gant ar wirionez  
evit al lodenn-levr-mañ. ha c'hoazh  
e vo ret deomp hen islodennañ e  
pevar rummad :

§ pinvidegezhioù touriskel :

OUTRE d'ar c'hestell toennet lemm, d'ar c'houlmerioù, d'ar manatioù kozh divanac'het, d'an ilizoù, d'ar chapelioù ha d'ar c'halvarioù, d'an tier nevez ha d'an tier kozh, ni hon eus ur wezh ar mare ur sell n'eus nemetañ war poull BRAS AR MOR !

BEZ hon eus BERRWELEDIOÙ ha HIRWELEDIOU (panoramaioù, hervez an dourisked !). e pep tro-gorn hon hentoù, (ha nag a droioù-korn hon eus !) e weler o tiplukañ un daolenn kaeroc'h-kaerañ, splannoc'h-splannañ ; un dudi, meurdezusaet c'hozh, hervez ar mare gant c'hwez n'eus nemetañ ar bezhin, ar balan, ar bleunioù milliv, pe ar foenn o krazañ, pe an douar o c'horiñ

AR GREUN, pe hini pinvidik an teil tomm o temziañ ar parkoù.

ha pa soñjer en hentoù koadmo-c'han ! hentoù ken dalc'het mat gant kantonierion BRO-C'HALL ! hentoù "aksidantet" evel m'hel lavar an dourisked. ha GWIR e lavaront. rak meur a hini n'en deus ket kavet e unan an distro ; meur a hini zo aet kuit e dreid en a-raok ! nemet peogwir e plij dezhe an hentoù aksidantet !

ha pa soñjer en hor menezioù uhel ha ledan, e c'heller gwelout erc'h war o gorre e-pad ar goañv, bloavezhioù'zo.

hag evel-se e c'hellfed kenderc'hel gant : « dolmenioù, menhirioù, koadeier, monumañchoù-BREZEL, » tud kozh riblennet o divjod hag o zal, dizantet, gwisket

ISKIZ, evel ma plij kement d'an dourisked kavout ER BROIOÙ TOURISKEL evit gellout OBER LUC'HSKEUDENNOÙ !

§ PINVIDIGEZHIOÙ SPEREDEL ha sevenadurel :

KARAKTER tuð koadmoc'han a blij kalz d'an dourisked. da skouer, en em ziwall a ra koadmoc'haniz da ziskouez eo re gempenn an traoù ; da reiñ re a goñfort d'an dourisked ! ER C'HONTROL : OBER A REONT PEZH A C'HELLONT EVIT DISKOUZ EZ INT UN TAMMIG GOUEZ, PEOGWIR EO "SE" EO E KLASKONT.

KANET E VEZ E KOADMOC'HAN KANAOUENNOÙ A BEP BRO HAG A BEP AMZER ! HAG OUZHPENN AR RE-SE, E VEZ KANET KANAOUENNOÙ KOADMOC'HAN.

EVIT AR C'HOROLL EO MEMES TRA. HAG A BINVIDIGEZH !

§ PINVIDIGEZH AR MAEZIOÙ :

AN AMZER N'EUS NEMETAÑ EO A ZO KIRIEK DA BINVIDIGEZH MAEZIOÙ KOADMOC'HAN.

HA TALVEZOUT A RA AR BOAN DIFAZIAÑ LEVRIOÙ TOURISKEL ALL, EMBANNET PIV A OAR PELEC'H ? HERVEZ AR PAPERIOÙ SE : DAoust ha ne vije ket AMZER VREIZH TOMM A-WALC'H PE ZOKEN SEC'H A-WALC'H ? AC'HANTA, NANN ! NE GREDIT KET SEURT KONIRIACHOÙ ! NI 'ZO RE DOST, KOMPREN A RIT ? NE Vije ket POSUBL MALAÑ GEVIER EVELSE DEOMP-NI !

EVIT PEZH A SELL OUZH AMZER KOADMOC'HAN, BEZAÑ EZ EO UN AMZER FRESK HA GLEB, UN DUÐI ! E KREIZ AN



hañv, zoken, e c'hell an unan bezañ gwisket un disterañ. marc'hadourion wiskamantoù-glav ha "peiñpluioù" a chom, digor o stal, zoken e-pad an hañv, ha c'hoazh n'int ket treut.

e koadmoc'han ne deer ket d'en em rostañ dindan un heol afrikat, nann. mont a reer gant dudi d'en em freskaat er mor. "fresk-pesk", pe "ar yec'hed gant ar freskour" setu sloganou koadmoc'han.

bep ar mare un arnev tomm a vez laosket warnomp, se zo gwir ! met bremaik e teu ar peoc'h gant ur banne avel dous ha fresk.

pa vez ar briñselezh, dre un darvoud spontus, hep un dakenn c'hlav e-pad div pe deir sizhun, pep unan, diouzh forzh pe rann relijiel pe direlijiel e vez, a ya da hiraat ur

BROSISION vroadel evit goulenn un amzer dereatoc'h. setu ur segred ha n'en deus morse c'hwitet c'hoazh betek-hen. gwir eo ne vez ket ezhomm atav a brosisionou. se zo kaoz eo hor maezioù ken dourek !

e broioù zo, war a lavarere, eo ar gwazhioù bras eo a ra war dro दौरaat ar plénennoù hag an traoniennoù. an-dra se a òle bezañ. plijus da welout, mar deo gwir ! evidomp-ni, an neñv e unan a ra war hon zro : penaos eta e c'hellfemp bezañ lous ?

#### § pinvidigezhioù boutin :

bez en deus koadmoc'han an dastumadenn aour ha mein lufr hag all..., ar vrasañ hag ar binvidikañ a'r

bed, hag ouzhpenn ! kement ha  
kement c'hoazh, ken e c'hellfe he  
friñs bezañ pouezet bep bloaz  
gant kant gwezh e bouez aour pe  
ziamant pe vein luf. ha se na pa  
zeufe da vezañ ken lart hag an  
aga c'han. hijañ rit ho pennoù  
dirak pezh a seblant deoc'h bezañ  
fougaserezh ? truez hon eus  
ouzhoc'h !

kemm a reot ho mennoz, trumm,  
pa vo lennet ganeoc'h al lodenn  
da zont.

koadmoc'han  
douar  
an istor  
hag  
ar marvailh

**P**ep-hini a oar ez eo menez-bre

uhelañ tosenñ priñselezh koad-moc'han.

evel un nerzh-hud a zever diouzh ar savadell douar ha rec'hell-se ; marteze, ivez, un nerzh speredel a vefe manet. war lerc'h kement darvoud istorel pe marvailhus c'hoarvezet war vre.

ne vefe ket a-walc'h gant kalz a levrioù evel-henn evit displegañ war baper an traou-se, kement a zo anezhe. unan hepken a vo kontet amañ : darvoud gwenc'hlann.

gwenc'hlann, daoust ha n'eo ket eñ brudetañ barzh armorika a-bezh. ur bravik a gastell en doa, pintet war c'horre ar menez-bre. c'hwil a gavo sichenn dismantroù ar c'hastell-se, bremañ c'hoazh, e kichen chapel ur barzh all, sant herve e anv. nepell, c'hwil a evo

dour fresk, gant pebezh doujañs, eus stivell wenc'hlann ; rak eviti da vezañ kleuzet damdost da lein uhelañ an dosenn, n'he deus ket paouezet an handon-se a zeverañ, takenn warlerc'h takenn, ar gwellañ dour benniget a c'heller kaout.

ar gwenc'hlann-se, doujet c'hoazh e goun, e lavarioù hag e ziouganoù, daoust ha ne oa ket eñ pinvidikañ den ar bed ?

gwezhall-gozh ar binvidigezh ne veze ket muzuliet evel d'an deiz a hirie, gant kement ha kement a vilhedoù dek mil lur, nann ; setu penaos e c'hellomp kontañ pinvidigezh gwenc'hlann :

pa varvas ar barzh meur, leun a furnezh, e voe, war e c'hourc'h-emennoù, karget e relegoù war ur c'harr. en-dro dezhañ e voe

renket e deñzorioù : seizh karg ha seizh-ugent e voe graet en holl, leun gant aour ha mein prizius.

mouchet e voe neuze daoulagad ar charretourion, nemet unan. hag int en hent, stag ha stag, an eil ouzh egile. goude bezañ diskennet krapenn an doseñn e reas goustad ar charre teir gwezh an dro d'ar menez-bre. mouchet evel ma oant, e kavas d'ar charretourion e oa hir an hent. int a soñje gante o devoa graet un toullad mat a levioù, pell mat diouzh ar menez.

noz oa pa voent erru el lec'h m'en devoa gourc'hemennet gwenc'hlann d'ar mestr-charretour mont.

divouchet e voe pep den, ha distaget pep aneval. bez e oant a-us

d'ur vengleuz don, teñval hag heklevus.

riklañ a reas karr-kañv gwenc'hlann hag an holl c'hirri war o fouez betek don an islonk. c'hoarvezout a reas neuze un dra euzhus nemet gwir koulskoude : an douar en em lakeas da grenañ gant ur safar spontus. an islonk a voe leuniet a rec'hier o pimboellat gant reveulzi ar c'hren-douar.

pellaat a reas, c'hwi oar, ar charretourion eus al lec'h spouronus-se ; hag int, mouchet adarre, da gemer, stag ha stag, an eil ouzh egile, hent ar gêr hag ar peoc'h.

ne vane er bed nemet un den hepken o c'houzout pelec'h resis e oa beziet gwenc'hlann hag e deñzorioù. an den-se e raed outañ furañ diskibl gwenc'hlann. hag eñ

a oa, d'ar c'houlz-se endev, rener  
douaroù koadmoc'han !

mar teze ho po chañs vat da  
glevout ur mésaer deñved bennak  
o tisplegañ ar rimadell-mañ, pa  
viot o pignal war vre :

kae dre ar c'hoad  
kae, ma mab,  
us dit ar menez  
kae war vre  
eno mañ gwenc'hlann  
flamm ha tan  
us da goad an hoc'h  
hoc'h ha doc'h  
koad ar pemoc'h gouez  
a vale  
koad an doc'hig moan  
'ra ket van  
dre greiz koadmoc'han  
kae dizoan.

a-raok dezhañ mervel d'e dro e  
roas tiern koadmoc'han d'e vab an  
urzh da ziskouez d'e bennhéer a-  
rumm-da-rumm, pelec'h emañ  
teñzor gwenc'hlann. setu penaos  
priñs koadmoc'han an deiz a hirie  
en deus ar gward war binvidikañ  
leve ar bed.





## furnezh koadmoc'han

AR BROIOÙ ZO EVEL AN ÒUD ; AN ÒUD ZO EVEL M'EMANT ! N'EUS NETRA A NEVEZ EN DEN, ABAOE M'EO KROUET AR OUENN. AK VUGALE O KEMER TECHOÙ MAT HA FALL O ZUD, A-RUMM-DA-RUMM.

en amzer wenc'hlann e oa ken techet ha bremañ an tuñ fallakr war ar fallagriezh, an arc'hantourion war an arc'hant, ar bolitikerion war ar politikerezh...

Gwenc'hlann a wele e vro o vont, ur relijion nevez oc'h argas endev e relijion gozh. n'eus netra nevez dindan an heol.

Daoust petra vije c'hoarvezet gant leve gwenc'hlann ma vije bet rannet etre daouarn diskibion ar barzh meur ? n'eo ket diaes ! pell zo e vije aet da dammoù, hag an tammoù o unan, da dammoù all strishoc'h ha, dre vunutaat, da netra. pell zo e vije bet ankouazh-aet zoken ! e-kichen bremañ : emañ c'hoazh an dastumadenn en he fezh. n'eus bet tennet diouti nag ar munutañ pezh aour, nag ur

berlezenn, nag ur c'halir, nag ur gurunenn, nag an disterañ lestr.

lavarit ouzhoc'h hoc'h unan, mar plij, pelec'h emañ « teñzorioù » ar bed ? - dispartiet mesk-ha-mesk, darn amañ, darn ahont, o servijiñ da netra ; o reiñ bouedenn d'ar brezel ha netra ken.

koulskoude n'eo ket gant aour nag arc'hant na perlez e vez graet ur predañ patatez !

aour a vez kaer, pa lufi ! met re zedennus eo eñ ; deuet eo da vezañ un doue ; un doue gouez ; un doue sot ; un doue mut ; ur c'hoarigell !

labourat evit bevañ, setu tonkadur an den : pep unan gant al labour a junt gantañ ; pep unan er vro m'eo tonket dezhañ genel ; pep unan o taremprediñ gant e nesañ, evit e zudi, evit e zudiañ, evit

eskemm mennozioù, temziañ spered; evit en em sikour, en em harpañ, dispartiañ an ezhommoù evel al labourioù.

dec'h BREIZH... hirie BRO-C'HALL... WARC'HOAZH EUROPA... kemm ebet en den. pep unan a chom gant e vad hag e fall.

petra vern da goadmoc'han madoù ha drougoù BREIZH ? da VREIZH madoù ha drougoù BRO-C'HALL ? n'hon eus mann d'ober an eil gant egile. ni a chom ni ; gant hor perzhioù mat a goadmoc'han, gant hor perzhioù fall a goadmoc'han.

dec'h gwenc'hlann a stourme evit chom gwenc'hlann. hirie koadmoc'han a stourm evit chom koadmoc'han.

O BREIZHIZ, c'hwi hon nesañ,

stourmit evit chom BREIZHIZ. na zeuit ket da vezañ koadmoc'haniz, na netra all !... na bouezit ket war hon speredoù na kennebeut war hor c'horfoù, war zigarez ez oc'h un tammig kreñvoc'h, nag evit c'hoari, nag evit spurmantiñ ho nerzh galloudek, evit hon lakaat da nac'hañ hor c'hoadmoc'han ! na lezit ket darn all da bouezañ warnoc'h-c'hwi...

GREOMP ur sell war batatezenn VRAS AR BED... kement ha kement a vor ; kement ha kement a aodoù, a goadoù, a lec'hioù gouez ; ha tud war c'horre, pep unan o vevañ hag o stourm e-lec'h m'emañ ; darn o klask ur vro da juntañ gante ; pep unan o c'hellout bale evit gwelout, deskiñ, plijout, displeijout ; boemet gant ar mor, dedennet gant ar

menezioù, nemet pegen laouen o  
tistreiñ d'e goadmoc'han dezhañ e  
unan, BRO E GORF, BRO E YEZH, BRO E  
DUÐ VAT, BRO E DUÐ FALL...

Daoust hag-eñ ez aio ar bed war  
wellaat pa vo marellet e holl  
vleunioù ?

ezhomm hon eus eus dalia, ognon,  
roz, bleuñv-avaloù, iliañ ha patatez !  
ezhomm hon eus a goadmoc'han-  
ioù, euskadioù, breizhioù, vietnam-  
ioù, marokoioù, ha flandrezioù !  
ezhomm en deus ar bed diouzh  
pep bro.

ma tegouezh da unan menel,  
eo digempennet an dra.

furnezh, hollvediz ! furnezh,  
breudeur dourisked ! temzit har-  
dizh ho liorzhoù, ha ni ivez, ez aimp  
d'ho kweladenniñ.

klaskit an teñzor n'eus nemetañ :  
ar gengarantez hag e vefet pin-  
vidikoc'h c'hoazh eget priñs koad-  
moc'han ! nemet... dizoan, da goad-  
moc'han, gwitibunan !

Goude lavar

— 65 —

re gaer e vefe bet an traoù ma  
vefe bev e kalon pep den kentel al  
levrig-mañ.

kaset eo bet breizhiz zo, c'hwil  
'oar, d'an harlu ! hag en o zouesk,  
piv eta ma n'eo ket priñsig koad-  
moc'han e-unan ?

panevet d'an darvoudoù a'n harlu  
e vije bet moulet pellzo al levrig-  
mañ e teir yezh keñver-ha-keñver :

koadmoc'haneg  
gant yellen

saozneg  
gant eobhan mac taggarth

galleg

gant kañfarded mari-robin, sik-  
ouret diouzh ezhomm gant ar jub-  
ennour galianek a-berzh-stad :  
uallosunomaros.





peurvoulet war wask an ti galles



e gwened d'ar 23 ebrel 1966  
copyright by henni hillion